

## KIS-453 – Distagadur ha skrivadur amprestoù 'zo

(GE – 12 03 94)

Evit un niver anvadoù oc'h aroueziñ ardivinkoù ha kalvezderioù e vez gwell mont dre an amprestañ. Div gudenn a sav neuze. Hini an treuzskrivañ ha hini an distagañ. Evit an treuzskrivañ e kavan mat loc'hañ diwar *Gerioù etrevroadel* Roparz HEMON, *HY* 12 rk.-1 m. 1956-1957, oc'h azgwelout alioù an aozer war veur a boent evel ma rae e-unan. Ur gwan en e reizhiad eo e tiazeze ar skrivadur war zistagadur ar galleg, ar saozneg a-wechoù. An doare aesañ da hepkoriñ ar c'hudennoù o tiwanañ diouzh an tech-se eo chom an nesañ d'ar skrivadur etrevroadel ha distagañ diwarnañ o heuliañ reolennoù an distagadur brezhonek<sup>1</sup>. Da skouer, Et. *laser* degemeret e brezhoneg gant ar skrivadur *laser* ha distaget [laser]. Heñvel dra, skrivañ ha distagañ Br. *transistor* [trānsistor], *transputer* [trānspyter], *vokoder* [vokoder].

Ur gudenn dibarek a sav a-zivout Et. *bus*. Mar daveer d'ar reolennoù degemeret evit treuzskrivañ ar gerioù latin e teznezier an dibennoù La. *-us* e Br. *-uz*. En degouezh-mañ avat emamp pell diouzh an orin latin ha ne dorromp ket ar reolenn emichañs o terc'hel ar skrivadur etrevroadel hag an distagadur keñverek : Br. *bus* [bys], ls. *busoù* [bysu].

Ur gudenn all a zezneuziadur a gaver gant Gl. *vidéodisque*, *vidéofréquence*, *vidéotransmission*. Euver e ve kaout koustet a gousto ur reizhiad rakgerioù brezhonek plaket dik diouzh ar reizhiad etrevroadel, dreist-holl pa na vez ar rakger etrevroadel nemet ur skritell galvezel plat. An dalc'h bepred eo dibab gant poell lec'h an troc'h ha gouzout pe elfennoù etrevroadel amprestañ. Spletus 'm eus kavet amprestañ Et. *video-*.

Daou aters a sav :

~ Hag amprest ar rakger etrevroadel hon endalc'h da amprestañ en e bezh an termen rakgeriet ? Hep mar e troioù 'zo ; da skouer : Et. *videotex*, Br. *videoteks*. E degouezhioù all ez eur techet da gempenn an termen rakgeriet o vrezhonekaat an eil tamm anezhañ — evel ma ra ar yezhoù all ivez ; da skouer : Gl. *anticorps*, Sz. *antibody*, Al. *Antikörper*, Br. *antikorf*.

---

<sup>1</sup> Sl. ivez KIS-378, La-09, pp. 262 hh.

~ En dro ma erlec'hier un elfenn vrezhonek ouzh eil lodenn ar ger etrevroadel amprestet, hag ur c'hemmadur a ranker ober ? Respont a ran nann, o taveiñ da dermenoù bezant endeo er yezh moarvat, evel Br. *antikorf*, *minibrozh*, met dreist-holl o soliañ war an arguzenn-mañ : keit ma ne vez ket degemeret ar rakger etrevroadel da rakger brezhonek a staelad leun, ne c'hell an termenoù brezhonek ma emañ, zoken gant un eil lodenn a orin brezhonek, nemet bezañ sellet evel amprestoù kempennet ezdalc'het a heuliañ reolennoù ar gerlunierezh brezhonek. Alese e kinnigan : Br. *videokantenn*, *videotalm*, *videotreuzkas*, h.a.